

Soniou Taldir

EVID AR BOBL

Priz : 2 wennek

Priz : 2 wennek

DISPUT

etre ar Gwin, ar Jistr,
ar Bier hag ar Chufere

War don kantik : Jezuz pegen braz eo

Ar Gwin

Sonjet pegen braz ê,
Plijadur an ene,
Oc'h eva deuz an noz,
Eur voutaillad gwin koz,
Pa ve kriz an amzer,
Hag an ere'h dre an er.

Ar Jistr

Te gomz a voutaillad,
O Gwin, ma c'hamarad,
Mez me ive, poir kez.

Eur lannac'h jistr ra vad,
Pa ver o labourat,
Ha da zibri ar pred,
N'euz ket gwelloc'h, me gred.
Ouspenn, barz en boutaill,
Me a lamm hag a zaill.

Ar Gwin

Pa vez 'barz en boutaill,
Te a lamm hag a zaill,
Mez gwin-champagn, assur,
A lamm beteg ar vur !
Kaer ez po d'in kontest,
Ma mignon, n'out ket gouest !

Ar Bier

Petra a glevan-me ?
Eur chikan marteze
Hag a droio da fall,
Mar ned an da ziwall.
Hola ! Jistr ha gwin koz,
Fachet oc'h, ma malloz ?

An Dourvel alaouret.
Ganin oa meventi
Hep chikaniou na si.

Goude eva Dourvel,
E santed o c'henel
Sonjezonou dispar
Ha hunvreoù a c'hloar...
Siwaz, dilezet on,
Ar gernez warhanon !

Ar Jistr

Hallo, kamaraded,
Eun akord a vo gret :
Ar Gwin d'an Aotrone,
D'ar Varzed, Chufere,
Bier d'an Hostizien
Jistr d'al Labourerien !!

Kanaouen ar Festou-Noz

Ton : *Me 'meuz eur botou iod*

Kanomp ar festou-noz,
Hag an dansou (*dionwech*)
Kanomp ar festou-noz,
Ha dansou an hini-goz.
War don ar c'hrampouz-gwiniz,
Savomp eur son pe ma ar c'hiz, lon, la
War don ar c'hrampouz-gwiniz,
Savomp eur son, Kerneviz.

Tennet ar patatez,
En holl barkou (*dionwech*)
Tennet ar patatez,
Dansomp holl gant levenez !
Bec'h a zo bet tro war dro,
Pleget hon c'hein war an ero, lon, la
Bec'h a zo bet tro war dro,
Dansomp brema eun dans bro.

Eur voutamad jistr pur,
A zo mad m'hen asur !

Ar Gwin

Me zo bet invantet,
Ebarz deraou (1) ar bed ;
Noë koz, te oar mad
A zeuaz en e brad,
Ken dous planten rezin,
Ma 'n em vëvaz lirzin.

Ar Jistr

Te gomz a rezin c'houek,
Mez daoust m'ê braz da vek,
Te oar e oa, gwechall,
Anveet an aval.
En Baradoz an Douar,
Oa avalou, hep mar !

Ar Gwin

Avalou oa, ian goz,
Mez barz ar Baradoz,
N'euz ket mennek a jistr,
Kleo ze hep bea trist.
Me eo meslr peb boëson,
Me ra vad d'ar galon.

Ar Jistr

Te ra vad d'ar galon,
Mez te zo eur poëzon ;
Eva jistr a c'haller,
Hep aoun da zond rouler,
Ar Sant bras Gwennole,
Eve jistr 'pad an de !

Ar Gwin

Sell ! Barz en bro ar gwin,
An dud zo holl lirzin,
Bepred e vent eürus,
Hag o spered joaüs,
Eno na weler ket,
Bizachou ankeniet.

Ar Jistr

Sell ! En bro ar jistr pur,
An dud a zo tud fur,
Tud kaled ha gwirion,
Hag ampart o c'halon,
Ar jistr a lak joaüs,
Sur mad, koulz ha gwin ruz !

Ar Gwin

Kaër ac'h euz, o ian gez
N'out mad 'med war ar mez !
Elec'h me ve laket,
War doliou ar brinsed,
Hag er festou hep fin,
Na ve lonket 'med gwin.

Ar Jistr

Gant ar paour 'on karet,
Gant ar c'houer enoret !
Ha me a istim ze
Koulz ha taol eur roue.
Mez n'ez ket da gredi,
On mad da daol' er pri !

(1) Komansamant.

E tie noan kasoni,
E kichen jalouzi.
Silaouet ar Bier,
A lar d'ac'h hoc'h affer.

Te, Gwin, a gred penoz
N'euz netra 'med gwin koz !
Koulskoude out poufer,
Rag kemend gwin ever
Siwaz, en de hirio,
Zo eur poëzon garo.

Sur war dek boutaillad,
Ne n'euz ket unan mad,
Laket e ve ennê
Beb sort louzou neve
Hag a ro liou gwin gall
Da goz evachou fall.

Ha te, Jistr, a lavar
Out koz war an douar,
Ha dreze, e fell d'id
Iafe ar maout ganid !
Mez te oar, mignon flour,
Ve ennout hanter zour !

Vid leunia 'r varriken
Ve laket dour feunten !
Ha c'hoaz zo ivantet
Gant ar farmasianed
Buredadou louzou
D'o 'r jistr hep avalou.

Vid achui ar gont
Ar Bier eo ar lontr !
En hostaleriou Breiz
Ar Bier, war ma feiz,
Ar drec'h war ar gwin gwen
Ha war ar Jistr melen.

Rag me zo marc'had mad
Eva ma boutaillad,
Evel champagn me vous
Evel jistr me zo dous !
N'on ket eur boëson fall
Na rentan ket meo dall.

Ar Chufere (a dremen dro eno)

Aotrone vraz ha kre
Me eo ar chufere,
Eur paour keaz boëson koz
Zo dilezet fenoz,
Ha na ve ken evet
En neblec'h dre ar bed.

Me am meuz ho klévet
O konta gant aked
Divarbenn ho kozni
Ho c'hoant hag ho parti.
Hogen, respet d'eoc'h,
An Dourvel zo kosoc'h.

Amzer genta ar bed
Me a vije evet !
En prejou peb roue
Na oa med Chufere.
Ar Vreiziz a galon
A gare ma boëson.

Ar Varzed, an Drouizien,
Koulz hag ar Varc'heien
A istime meurhed

War eun ton gallaou anavezet

Hallo, Soudard ma mignon, lon la,
Hallo, soudard, ma mignon,
Kemeromp 'ta kalon,
Ha kanomp c'hoaz eur sonen,
Kemeromp 'ta kalon,
Ha kanomp c'hoaz eur son !

Kanomp bepred 'n eur gerzet, lon la,
Kanomp bepred 'n eur gerzet,
Hag hon diouc'har skuizet,
A bigno c'hoaz ar grec'hen,
Hag hon diouc'har skuizet,
A zivorzo abred.

Pa ve gret al leo genta, lon, la,
Pa ve gret al leo genta,
Ar sac'h a bounnera
Hag ar c'hartoucherenou,
Ar sac'h a bounnera
War griben an diouskoa.

Mez d'an eil leo ni zonjo, lon, la,
Mez d'an eil leo ni zonjo,
En hon zud zo er vro
Ha hi koz ha glac'haret,
En hon zud zo er vro
O c'hortoz hon distro.

Ha d'an derved leo brema, lon, la,
Ha d'an derved leo brema,
Ni zonjo da genta,
N'hon mestrezik dudius,
Ni zonjo da genta
N'hon mestrez ar c'hoanta.

D'ar bederved leo, zonjomp, lon, la,
D'ar bederved leo, zonjomp
Er pardonieu brudet,
Hag en holl asambleou,
Er pardonieu brudet
Lec'h hon euz bet danset.

Ha d'ar bemped leo goude, lon, la,
Ha d'ar bemped leo goude,
Ni zonjo er c'honje,
Hag er permissionou,
Ni zonjo er c'honje
Bevet al liberte !

D'ar c'houec'hved leo ni zonjo, lon, la,
D'ar c'houec'hved leo ni zonjo
En termen diveza
Pa vefomp dishualet,
En termen diveza,
Leusket ar vuez-ma !

D'ar seizved leo ni zonjo, lon, la,
D'ar seizved leo ni zonjo,
Barz ar repoz buan,
Rag ar zac'h zo gwall bounner,
Barz ar repoz buan,
Hag er c'hantonaman' !

Pa vemp er c'hantonaman', lon, la,
Pa vemp er c'hantonaman',
War ar plouz astennet
Ni gousko eved aële,
War ar piouz astennet,
E-kichen al loened ! !

Allo ! Buan jistr mad,
Evid rei nerz d'ar Breizad.
War lerc'h eun devez labour,
Pleget hon c'horf evel eur skour, lon, la,
War lerc'h eun devez labour,
E ve pec'hed eva dour !

Un, daou, tri, pevar, pemp,
Dansomp brema (*diouwech*)
Un, daou, tri, pevar, pemp,
Hon roched a zo war dremp !
Potred merc'hed asamblez,
Méromp al leur a strop botez, lon, la,
Potred merc'hed asamblez,
Houma zo eul leur nevez !

Ar foen zo dastumet,
Er chanillou (*diouwech*)
Ar foen zo dastumet,
Hag an ed a zo medet ;
Ar goanv zo arru brema,
Gant miz Here 'barz ar vro-ma, lon, la,
Ar goanv zo arru brema,
Prestik e vo red krena !

Da c'hortoz, Bretoned,
Tro d'an dansou (*diouwech*)
Da c'hortoz, Bretoned,
Kasomp en dro ar merc'hed !
Rag pa zeui an Ankou koz,
D'ober e dro 'barz ar barroz, lon, la,
Rag pa zeui an Ankou koz,
E vo fin d'ar festou-noz.

*Tra la la, la, la, la,
Tra la, la, la, etc.*

Gwerz war maro eur plac'h iaouank

Ton : *Ma c'halon a zo fraillet.*

Me glev en tour ar gearik taoliou an Angelus,
Me glev ar vesaërien o c'houtellat skiltrus,
Hag al labourer-douar o tond euz e barkou,
O teurel e ganaouen bete bolz an Nenvou.

Steuzia ra brema peb tra en dremwel, tro war dro,
Ha tam dre dam ar sioulder en em skuill war ar vro
Ne glever ken er maezou, nemep iouc'h ar gawen,
Pa skrij an askel-grochen, 'barz an ear o tremen.

Koulskoude, 'barz ar vered, en dro d'an iliz koz,
Meglev c'hoaz eundrouz bennage sevel kreiz an noz
Ma skouarn a gleo mouezigou o tond euz ar beziou,
Siouaz, trist ha hirvoudus 'vel garm an aveliou.

Ama hini eun den koz o c'hervel e vibien,
Da zond d'hen dichadenna dre nerz eun oferen :
Aze hini eur vaouez, marvet er fall-ober,
O teurel he malloziou d'ar bed ha d'he gwaller !

Duze, mouez eur gwaz yaouank, en kreiz e nerz kouezet
O c'hervel e vestrezik gand eun ton ankeniet,
Vit 'n em unani er bé, 'vel ma westjont gwechall.
Mez an douzik zo bouzar !.. Paret' deuz gand eun all !

Eur vouez dreist-holl o sevel euz londer an douar,
A zeblante d'in beza karget a wall-glac'har :
Eur vouez dudius e oa, mez an daërou c'houerva,
E-giz d'eun deillen seac'het rea d'ezi krena....

Gwechall e oa koant houma. Ebarz ar pardonio,
E selle eveuz outi holl bôtred vat ar vro,
Ha pa 'n em gave dansou, na zibabet 'methi ...
Meur a waz a hun reaz diouz an noz d'he dudi !

Eun nozvez ien, o tistrei deuz ar bal, er gear vraz,
Allaz ! ar plac'hik iaouank oa skoet gand ar paz :
Gwenaat 'reaz an diouchod oa bet ken rozenet...
War eur gwele a boaniou e ma hi gourvezet.

Marveteo ! Paour keaz plac'hik, hag er bediskennet;
He c'horf ken drant zo roet evid boued d'ar prenved !
N'euz chomet man diouthi 'medeur sonj glac'harus,
He mam hepken a hirvoud klemvanou truezus.

Klem en da ve, plac'h iaouank; na glev den ac'hanoud,
Ar re da gare gwechall na glevont da hirvoud !
Den n'en euz sonj ac'hanoud,... 'med da vam glac'haret,
A zisprizez koulskoude 'vid dansou ha potred ; ...

Mervel ec'h eo al lezen ! Hag ar mœc'hed iaouank,
Dibabet 'kreiz ho gened a gouezo ive stank !
Red mad eo d'an dour heuilla e arouden merket,
Red d'ar ieoten alaouret beza d'he zro falc'het ...

DISPUT

etre eur Soudard hag eur Martolod

Ton Dans Tro

Ar soudard

Demad d'id, kamarad, penoz e ma ar bed,
Sethu tremen daou 'lâ n'hon boa ket 'n em weled.
E pelec'h e oas-te oc'h ober da zervich ?
Te zo eur martolod a zo kanfard mar plij !

Ar martolod

Ar soudard

Evit difenn ar vro, n'eo ket ar martolod,
Deuz lavar ar re fur 'nefe ar gwasalod.
Mez war ar c'hrennarded e kouefe ar bec'h braz,
Ar boulejou hirie a lac'h pemp war dek gwaz.

Ar martolod

Mar diskar pemp war dek brema ar boulejou,
Ar mor a lonk 'n eun tol kant war gant awechou,
Ha pa zeu eur bouled da doulla eul lestr dir,
Hema ia bet ar fonz gant kemend den a vir.

Ar soudard

Forz a zo, ma fotr kez, soudard pe vartolod,
Gallout a ramp anzaou ec'h eo pounner hon lod,
Kaled eo ar vicher ha diot aliez.
Evid ar Vretoned dreist-holl ec'h eo diez.

Ar martolod

Ia, vat, me 'meuz klevet penoz 'barz an arme,
Ar paour kez Bretoned vije gret goap oute !
Ha penoz ar « Maho » ne oa med eur pemoc'h,
Daoust hag hen e ve gwir kement-se ganeoc'h.

Ar soudard

Siwaz ! Var ar poent-se ec'h on akord ganid.
Barz kazerniou hon Breiz, war ma fe laran d'id,
Normanted, Gallaoued, ha tud euz a Bariz,
Dalc'h-nad e fell gante iafe pep tra d'o c'hiz !

Ar martolod

Ama e trec'h ar mor war blankennou ar zaout,
Aze, ma mignon kez, a teu ganemp ar maout.
'Mesk ar vartoloded an dri c'hart zo breton,
Ar breton a zo mestr war c'houre ar mor don.

Ar soudard

Gwell a ze, martolod, mez poent eo kimiadi,
Arru eo d'emp ar c'hlast ! Daou 'lâ zo gret war dri.
Kenavo, red eo mond. Ni 'n em welo er vro,
Mar na deu ket brezel da gas d'emp ar maro.

Ar martolod

Kemer amzer, soudard ! 'Benn ma teuo brezel,
Ni 'momp kavet, potr kez, 'mechanz beb a Gatel.
Deuz d'an hostaliri da danva eur bannac'h,
Ar mor eur wech le mag a leunio d'in ma zac'h.

* * *

Mez sethu 'la eun affer all !
Pa oë kouezet an noz du-dall
War ar bourkik sioul ha didrouz,
Barz an iliz me glevaz trouz.

Ha me vond da zilaou neuze
Gant ma skouarn tôull an alc'houe
Ha sed ama petra gleviz
Me hen tou d'ac'h, 'barz an iliz :

Mouez Sant Weltaz, diwar e fijen :

Piou ve gret dioud sant neve
A zo war blad ar c'heur aze ?

Mouez flour Sant Moriz :

Me eo sant Moriz binniget -
A zo mestr war zoudarded.

Sant Weltaz

Te, war e welan, ma den mad,
N'out ket henvel deuz eur breizad !

Sant Moriz

Me a zo ganet en pell bro,
Mez 'vid ar fe ec'h on maro !

Sant Weltaz

Ma gourc'hemennou, sant neve,
Kaër eo mervel evid ar fe,
Mez lavar d'in ha te zo mad
Er bed-ma ive da iac'haat ?

Deuz a betra wellaez-te ?
Petra eo da « spécialité » ?
Ebarz ar vro-ma, kazi tout
Ar sent 'deuz o zammik galloud.

Sant Moriz

Diez e ve d'in laret d'ac'h...
Na wellean nemed tud iac'h !
Mez dre m'on tost da dron Doue
Me a zalvo meur e ene.

Sant Weltaz

Salva eneoù a zo ez !
Gwellant ar c'horf a zo diez !

Ar soudard

Er gear a Sant-Briek on soudard daou 'lâ so,
'Barz ar c'hazern Charner, ar goanta deuz ar vro;
Eno ar chambreoù a luc'h evel gwer skler,
Hag ar paketajou a zao plom 'barz an êr.

Ar martolod

Petra a glevan-me deuz da c'hinou, soudard ?
Ha ! potrik paour, 'meuzaoun n'out man med eur c'hanfard ?
Pesort chambre a luc'h vel pont eul lestr brezel ?
Pelec'h zo muioc'h urz 'vid er *Charles-Martel*.

Ar soudard

Te gomz brao, den a vor, ha lore'h a zo ennout,
Kaëroc'h eo da gojou evid n'eo da c'halloud,
Rag ni, ar soudarded, a zo holl tud kaled,
Tri ugent liur warnomp er marchou ve gweled.

Ar martolod

Esoc'h war an douar eo dougen sammou braz,
Evit beva bemde hijet war an dour glaz,
O pignat er gwerniou hag o checha heoriou,
Hag aliez en riskl da goll hon bueziou.

Ar soudard

Ni ive aliez a c'hall koll hon bue,
Dre glenvejou stagus ha dre skwizder ive !
Dre an derzien tapet o kousket deuz an noz,
War an douar kaled, hep gwele da repoz.

Ar martolod

N'euz forz ! Aliez gwech c'houi gousk en eur gwele,
Mez ni en eur hamak, 'tre ar mor hag an ne.
Hon bue zo garo. Ni a c'hall chom tri miz,
Hep diskenn d'an douar, kaer hon euz bea skwiz.

Ar soudard

Ni dremen revuiou war an tachennou braz,
Renket ha zonn 'vel dir gant hon dilajou glaz,
Ar c'hartouchierennou hag ar sac'h ouz hon c'hein,
Ar batonetezou plom en er evel drein.

Ar martolod

Fé ta ! Te zo pouffer ! Petra eo Ian Soudard ?
Eur soudardik war droad n'eo nemed en c'hrennard.
Ar merc'hed na blich d'ê nemed martoloded,
En peb korn deuz ar bed ni a zo istimet.

Denp da glask eun daken, da c'hounn digant Doue,
Ma teui prestik ar c'houlz vo ken ezom arme ?

Ar Sant Plastr hag ar Sant Dero

War don : Fontanella.

Pe da lavaret.

En eur barroù a Vreiz-Izel
A oa neventi n'euz ket pell.
Eur sulvez, epad an ofiz,
Eur sant a welched en iliz.

Eur sant oa 'n e zao en eur c'horn
Henvel deuz beo, kig hag askorn,
Eur sant neve flam alaouret
Gwisket evel ar soudarded.

Eur gwall ear den en noa ar sant :
War lein e benn, eur c'hask arc'hant,
War e vruched, eur chupen dir
Hag en e zorn, eur c'hleze hir.

E zaoulagad lem lugernus
A bare vel daou gef skedus.
« Daoust ha piou e ar sant neve ?
Eme an dud 'n eil d'egile.

Biskoaz na welchomp ken brao sant
Deuz a Dreger d'an Oriant !
Daoust war be glenved ec'h eo mestr ?
Fluz ?... Poan izili ? Droug ar vestl ? »

Mez goude 'n ofern, ar person
A reaz eun lammik sermon :
« Echuomp, 'mezan, an ofiz
Dre eur beden da sant Moriz ! »

— « Sant Moris ! eme peb kristen,
Eun hano brao evit eun den .
Mez war ma fe, c'hoaz na gleviz
Tenna kont euz a sant Moriz ! »

Peb sant breton zo medisin,
Ze zo kaoz hon euz an istim

Sell 'ta diouin ! Me zo barrek
Da wellaat klenved ar c'hezek.
Deuz ar boan-benn on mad asur,
Ha deuz ar gounnar, a dra zur.

Sant Moriz

Tao da vek gant sent Breiz-Izel !
Me zo bet eun den-a-vrezel
Ha 'moa ket amzer da ziski
Parea klenved pephini.

Mez war ma zabren, me dou d'id
Da skei taoliou mad on akuit.
Ha mar tale'hez d'am insulti
Me ia da c'houeza d'id da fri ! !

Sant Weltaz

Amzer ! Amzer ! 'me Gweltaz koz,
Me ziskenn davedout. Gortoz !
Me en em ganno koulz ha te
Na pa 'meuz na baz na kleze !

* * *

Sant Weltaz a reaz eur saill
Diwar e jijen ; ha bataill
A grogaz dustu 'tre an daou.
Stard e oa, me lar d'ac'h, an traou !

Sant Moriz, gant e gleze braz,
A skoe war benn Sant Weltaz,
Mez penn Sant Weltaz oa **dero**
Ha na faoute ket en eun dro.

Souden, Sant Weltaz 'meuz kroget
En kollier mestr ar soudarded.
Hema frikaz war an iliz....
En **plastr** e oa gret Sant Moriz !



Keraez, Moullerez Ar Bobl